

(46)

Ar Vran hac al Louarn.

Eun devez eur Vran born, schijet var eur vezen,
 A zalc'he en he beg eur pezh patatezen;
 Allanic al Louarn, ar c'hoez mad pa zantas,
 Equis eur c'hànjoler dezji a lavaras,
 Var ton tra la, la-la-la, var ton tra la la-la,
 Var ton tra la dire dire la la.

Bonjour dèc'h, itron Brân: penos a reomp-ni?
 Eleal, mestr Louarn, brao avoalc'h ouñ; na c'houi?
 Va bugale ive, sepet an diverza,
 A zo gant ar c'hochech, daou devez zo dija.
 Var ton tra la, &c.

Oh, Brân! pequeñ caer oc'h gant ho robe hep pris!
 C'houi oc'h eus sur laqet he ober en Paris?
 — Ja, eme ar Vran, vel eur gaqueteréz,
 Hac e hanv d'al Louarn ty he c'hemenerez,
 Var ton tra la, &c.

(47)

— A feiz! mar deo ho moez hanval ouz ho tillad, (1)
 C'houi a dle anfonci an oll gannerriey vad.
 Carit din, me ho ped, ho sonnion magnific,
 Rac ebars ho famill voar crén voar ar music,
 Var ton tra la, &c.

Oergent an itron Brân, hep beza re bedet,
 A c'hrosmol dre he fri an Tour dantelezet; (2)
 Mes dre ma rang he beg digueri da gana,

(1) Al liquen-mâ hac an hini e goude a eller chenc[?] evellen:

— A feiz! mar deo ho moez hanval ouz ho chupen,
 C'houi a dle anfonci ar c'haner Yan ar Lyen.

(2).- Dans l'imprimé (feuille volante), Lédan a mis cette note: « Chanson all,
 composet gant A. Lédan... »

122

Ar batatezen zo leusket prest da goeza.
Var ton tra la, &c.

Ractal mestr Allanic, a gonté mad var ze,
Var ar batatezen a yaill diouc'h-tu neuze.
Evel eun tord e c'hoarz an tam mastin frippon,
En eur frotha e gôf, ar joo en e galon.
Var ton tra la, &c.

Trêi a ra ouz ar vrân, hac e lavaras dêi
O tont d'e c'hagetal hac ober goab anêi:
Me meus ho trappet brao! vil e zeo ho tillad;
Ne ouzoc'h get cana. Ho patatez zo mad.
Var ton tra la, &c.

O clêvet an dra-ze, ar vrân maleüruzez
Zo carquet a zespit, confortet gant ar vez.
Ah! perac an duel a deuer da zifen!
N'em bize da lazet gant eun tol pistolen.
Var ton tra la, &c.

(48)

An oll lapousset all, o clêvet comz ouzün,
A deuyo d'am goapât brêmâ dindan va min.
Me, mestrez ar Brini, trappet gant Renanic,
A vo sellet brêmâ vel eul laouenanic.
Var ton tra la, &c.

Clêvit ar voralen eus ar c'houplejou-mâ;
Brini, bras ha bian, va zelaouit amâ:
Pa vo leun ho qinou demeus a batatez,
Serrit ervad ho peg, ha grit tevel ho moez.
Var ton tra la la la-la-la, var ton tra la;
Var ton tra la dire dire la la.

fin. A. Lédan.

(Vol. VII, p. 46-48.)
strophes non numérotées.

[Aux strophes 1, 3^e vers; 6, 1^{er} vers,
le syll. All de Allanic surcharge
Ren, de Renanic. - "Ren" est illisible
sous la correction, mais se déduit
d'après le 3^e vers de la 9^e str., où
Renanic a été maintenu.]